

KANTIK SANTEZ BARBA

Var don : *Itron Varia Rumengol.*

DISKAN

Santez Barba, dirak Doue,
Bezit sonj euz ho pugale :
Diouz an tan, ar maro subit,
Diouz ar gurun hon diouallit.

I

Ar Zantez-ma 'zo pennerez,
Leun a vadou, leun a zanvez,
Mes he zad a zo eur païen,
Enebour bras d'ar gristenien.

II

En he balez an idolou
A reseve kals enoriou :
Mes gant Doue sklerijennet,
Barba d'ezho ne zouje ket.

III

En despet d'he zad kounnaret,
Ar verc'h iaouank 'zo badezet :
Dridal a ra en he frizon,
Seder, eürus eo he c'halon.

IV

Diskar a ra an idolou,
O bruzuna gant he boutou :
« Ra vezoc'h dre oll distrujet,
A gant an dud oll forbanet. »

V

Pa vel en he di diskaret
An idolou ganthan savet,
Ken ma vo he verc'h kastizet,
Tad hor Zantez ne c'hel kousket.

VI

Evel eur bleiz o iudal,
E saillas var Barba raktal :
Dre an drez, ar spern he stlejas,
Dindan he dreid hen he sterdas.

VII

Kerkent he c'horf 'zo dispennet
Gant kribinou hir a kalet :
Ar Verzerez a zo eürus
Da c'houzanv evit he Jezus.

VIII

An tyran nec'het gant Barba
A roaz urz d'he dibenna :
Ar Zantez ne ra van ebet
A d'ar maro dispoint a red.

IX

O ! tra euzus da lavaret !
Tra spountus da veza klevet !
He zad, bourreo ar c'huella,
En em ginnig d'he dibenna.

X

Kerkent he dorfet echuet,
An tad muntrer 'zo kastizet :
Eun tar-kurun spountus a kre
Her pulluc'has aberz Doue.

XI

Vit enori santez Barba,
Evel d'o mam santez Anna,
Meur a chapel en dro d'ar bed
Ar gristenien o deuz savet.

XII

Ama an oll a zo d'ezhi ;
An oll o deuz fizians ennhi ;
An den koz o vont da vervel,
Ar bugelik en he gavel.

XIII

Santes Barba, hor Patronez,
Dalc'hit ar feiz en hor bro gez ;
Goulennit ma chomimp bepred
Guir Vretoned, pennou kalet.

XIV

Hon tud koz o deus ho karet
Hag e peb amzer ho meulet :
Ni ho pedo, mintin a noz,
Evit mont oll d'ar baradoz.

Imprimatur :

Kemper, 8 Guengolo 1891.

F. OLLIVIER, v. g.